



Evit ur gouarnerezh breizhat nevez e dek poent

Emglev Kevredel Breizh
<http://www.afb-ekb.org>
bretfed@yahoo.no
Emezeladur 20 €

Bez 'ez eus eus Breizh, dre he fobladur hag heh istor, un hollad disheñvel gwirion. Dre se eo reizh da vat e vefe roet dezhi aozadurioù demokratel a-du gant he fersonelezh dibar ha diouzh youl he foblañs. Pell emañ Yann diouzh e gazeg bremañ p'emañ dispartiet diouzh ar vro ur bempvedenn eus he ziriad, hag a dalvez 40% eus he galloudezh armerzhel, hag e chom c'hoazh dindan gward ur galloud kreiz a lez ganti nebeut a frankiz ober war dachenn an endro, ar gevredigezh, an armerzh, ar yezhoù hag ar mediaoù. Ar sujidigezh vezhekaus-se eo a nac'h Emglev Kevredel Breizh, anezhañ ur strollad lec'hiet e-kreiz ar c'hoari politikel evel ma seller outañ er Frañs. Embann a reomp sklaer ivez ez eus ac'hanomp kevredadelourien europat. An enkreiz armerzhel grevus m'emañ ar Frañs a red adsevel ar strollezhioù lec'hel gant daou bal: muioc'h a efedusted ha nebeutoc'h a zispignoù. Dre ma argasomp ivez an diskoulmoù pellvanek, na gasont da neblec'h, e kinnigomp ar gouarnerezh nevez-mañ e dek poent. Ur respont hardizh ha beziadek d'an daeoù a-vremañ gant ur spered a atebegezh hag emziviz.

1. Lakaet eo Breizh da dachenn ganti ar gwir da arnodenniñ.

2. Adaozadur rannvroel.

- (a) Distro al Liger-Atlantel en hollad breizhat [40% eus armerzh Breizh]. Echuiñ gant un dra euzhus krouet gant goarnamant Vichy.
- (b) Un dezvad arbennik a vo gant tolpad Kêr Naoned.

3. Melestradurezh.

- (a) Lemel kuit ar prefeded ha dreistprefeded. En o flas e vo ur Gomision Gemmesk Kempar, enni dileuridi eus ar Gouarnamant hag ar Rannvro. E karg e vo eus heuliañ an darempredoù Stad-Rannvro. Cf. Italia m'eo miziek an emvodoù.
- (b) Muioc'h a bouez roet d'ar Rannvro ha d'ar broioù. War grenn dermen ne vo departamant ebet ken.

4. Dilennadegoù.

- (a) Difennet e vo berniañ leuriadurioù.
- (b) Dilennadegoù rannvro. 2/3 eus an izili dilennet e framm ar rannvro hag 1/3 e framm an departamant.
- (c) Dilennadegoù Europa. Dilenn ar gannaded e framm ar rannvro.
- (d) Dilennadegoù Senad. Ur gambr kannaded ar rannvroioù a gemer plas ar Senad. Ar Senadourien (2 e pep departamant) vo dilennet ha dizorniadus gant ar Rannvroioù. Cf. Bundesratt Alamagn.
- (e) Kreñvaet e vo ar C'huzulioù-bro.[daou bal zo gant ar poentoù 3b, 4b ha 4d: eeunaat ar skeul velestradurel en ur reiñ. Muioc'h a bouez d'ar rannvro hag en ur izelaat an tailhoù. Kement-se a vez graet c'hoazh e meur a Stad en Europa.]

5. Tailhoù.

- (a) 60% eus an tailhoù dastumet er Rannvro a chom enni -46% bremañ. Cf. Kumuniezh Emren Bro-Vask e Spagn.
- (b) Merañ eeun an arc'hant europat gant ar Rannvro evel e Bro-Alzas.

6. Deskadurezh.

- (a) Rannvroelaat an deskadurezh, pezh a roio tu da aozañ ennañ ar c'helenn brezhoneg.
- (b) Digeriñ ur Blein Skolveuriek Etrebroadel.

7. Endro ha diorren padus Fiziet er Rannvro: merañ an dour, raktres en energiezh, merañ an aodoù hag ar takadoù gwarezet. Mirva an aodoù. Cf. Bro-Skos.

8. Gwareziñ sokial ha reizhad yec'hed diwar skouer Bro-Alzas (hep divigad).

9. Politikerezh yezhel. Div yezh ofisiel e Breizh, ar brezhoneg hag ar galleg. Lakaat da dalvezout penn-da-benn Karta Europa ar Yezhoù Minorelaet ha Karta Gwirioù Diazez Unvaniezh Europa [Mellad 22].

10. Tachenn etrebroadel

- (a) Sevel Europa ar pobloù war ar patrom kevredel.
- (b) Lakaat Diaspora ar Vretoned da gemer perzh e Gouarnerezh ar Rannvro. Honnez a zibabo dilennidi evit derec'hel perzh er Gouarnerezh-se.



Pour une nouvelle gouvernance bretonne en 10 points

Alliance Fédéraliste Bretonne

<http://www.afb-ekb.org>

bretfed@yahoo.no

Adhésion 20 €

La Bretagne constitue, par son peuplement et son histoire, une entité spécifique indéniable. En conséquence il est parfaitement légitime qu'elle soit dotée d'institutions démocratiques en accord avec sa personnalité originale et selon la volonté de ses habitants. C'est loin d'être le cas actuellement puisque non seulement elle est privée d'un cinquième de son territoire, lequel représente 40% de son potentiel économique, mais elle reste encore sous la tutelle d'un pouvoir central qui lui laisse très peu de marge de manœuvres dans les domaines environnementaux, sociaux, économiques, linguistiques ou médiatiques. C'est cette sujétion humiliante que rejette l'Alliance Fédéraliste Bretonne / Emglev Kevredel Breizh qui se positionne au centre de l'échiquier politique tel qu'on le conçoit en France. Nous affirmons aussi nos convictions fédéralistes européennes. La très grave situation économique dans laquelle se trouve la France, impose une refonte des collectivités locales avec deux objectifs: plus d'efficacité et moindre coût budgétaire. C'est aussi parce que nous rejetons les solutions extrémistes, sans issue, que nous présentons ce programme de Gouvernance. Elle est une réponse audacieuse et réaliste aux défis actuels, dans un esprit de responsabilité et de dialogue.

1. La Bretagne est instituée comme zone de droit à l'expérimentation.

2. Réorganisation régionale.

- (a) Retour de la Loire Atlantique dans l'ensemble breton. [40% de l'économie bretonne]. En finir avec un anachronisme créé par le régime de Vichy.
- (b) L'agglomération nantaise aura un statut spécifique ¹

3. Administration.

- (a) Suppression des superpréfets et préfets. Ils seront remplacés par une Commission Mixte Paritaire composée de délégués du gouvernement et de délégués régionaux. Elle sera chargée du suivi des relations Etat-Région. cf. Italie où les rencontres sont mensuelles.
- (b) Montée en puissance de la Région et des Pays. Disparition à terme du Département.

4. Elections.

- (a) Suppression du cumul des mandats.
- (b) Régionales. 2/3 des membres élus dans le cadre régional et 1/3 dans le cadre départemental
- (c) Européennes. Election des représentants au parlement Européen dans le cadre régional.
- (d) Sénatoriales. Le Sénat est transformé en Chambre des représentants des Régions. Les Sénateurs (2 par département) seront élus et révocables par les Régions. cf. Bundesratt allemand.
- (e) Renforcement des Conseils de Pays. [les points 3b, 4b et 4d ont un double objectif: simplification des échelons administratifs en favorisant la montée en puissance de la Région et allègement de la pression fiscale. C'est ce qui existe déjà chez nos partenaires européens].

5. Fiscalité.

- (a) Impôts: 60% perçus dans la zone y restent.(46% actuellement). cf. Communauté Autonome Basque
- (b) La gestion directe des fonds européens est confiée à la région. cf. Alsace.

6. Système éducatif.

- (a) Régionalisation de l'enseignement, ce qui permettra d'intégrer l'enseignement de la langue bretonne.
- (b) Ouverture d'un Pôle Universitaire International.

7. Environnement et Développement durable seront confiés à la région: gestion de l'eau, prospective énergétique, gestion du littoral et des espaces protégés (Conservatoire du littoral). cf Écosse

8. Protection sociale et Système de Santé sur le modèle alsacien.(non déficitaire).

9. Politique linguistique. Le français et le breton seront les deux langues officielles de la Bretagne. Application intégrale de la Charte Européenne des Langues Minoritaires et de la Charte des Droits Fondamentaux de l'Union Européenne. [Article 22].

10. International

- (a) Construction de l'Europe des peuples sur le modèle fédéral.
- (b) Implication de la Diaspora bretonne dans la Gouvernance régionale au travers de représentants élus.

¹L' idée est de faire de Nantes une sorte de Ville-état à l'exemple de Hambourg, permettant ainsi d'échapper à la sempiternelle et préjudiciable rivalité Nantes-Rennes. Moyen aussi de satisfaire les tenants de Nantes-Métropole.